

# FICHENN METODOLOGIEZH

Da vare priziadenn ar breved ho po da respont dre skrid d'ur goulenn bennak en un doare urzhiet. Ret e vo deoc'h eta strolliñ ha frammiñ an elfennoù a implijoc'h en ho respont , a-benn sevel un displegadenn poellek,aozet, frammet,urzhiet ha prouet get skouerioù e ugent linenn bennak.

## **A. Strolliñ elfennoù ar respont**

-derc'hel soñj ag ar gentel pe ar studiadenn graet diàr-benn ar goulenn savet.

- deziadoù:
- Tud pennañ:
- Gerioù pennañ:
- Skeudennoù:

-sevel ouzhoc'h hoc'h-unan goulennoù liesseurt diàr-benn ar sujed da zisplegiñ? Pegoulz? Piv? E men? Petra? Perak? Petra eo bet an disoc'h?

## **B. Urzhiiñ an displegiñ**

-lakaat àr-wel elfennoù pennañ ar respont ha renkiñ anezhe en urzh.

## **C. Skriviñ an displegiñ**

**a. Sevel un digoradur:** ret eo kinnig ar sujed en ur gemer en-dro ar gerioù-alc'hwez (gerioù pouezus) é termeniñ anezhe evit lakaat àr-wel ar pezh ez a da ziskouez. Achuit ho digoradur get ur c'hudennadur da lâret eo kinnig get ur frazenn nemeti sujed ar goulenn.

**b. Implij an dielloù:** pep diell a gas deoc'h titouroù prizius evit respont d'ar sujed kinniget. Arguzennoù int evit ho pennad.

**c. Implij ho kouigiezhioù:** n'eo ket trawalc'h get an dielloù, ret eo deoc'h magiñ ho pennad urzhiet get ar gouiziegezhioù ho peus desket er c'hlas( ar gerioù nevez, anvioù, deziadoù.....)

### **d. Aoziiñ tout-se !**

-Sevel ur steuñv er broulhoñs (2 pe 3 lodenn)

-Sell hag eñ vez meneget titouroù an holl dielloù er steuñv.

-Sevel ar pennad o tispartiañ mat al lodennoù (lammal ul linenn hag ober un alinea tri c'harrez evit pep lodenn)

-Diwall non pas adkopiañ morse an dielloù

-Dav eo arguziñ gant skouerioù (gwelloc'h eo ar skouerioù n'int ket en dielloù dija).

**e. Ur c'hlozadur:** echuiñ an displegiñ get ur frazenn a adlavar e berr gomzoù ar respont ho peus kinniget.